

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

24. ANN ANAOUN

Eur plac'hik keaz a ouele flamm
 gant ar c'hoant^o da welet he mamm. °a-us : c'haon he doa d'
 gant ar c'heuz he devoa dezhi
 goude m'oa maro digant-hi
 ouela 'rea hag huanadi
 ha n'oa den vit he frealzi^o °a-us:enn noz, en deiz er
 bete zoken^o he c'hovessour °a-us:meaz, en ti
 en doa poan vraz war he zikour. °a-us:ann holl kerkoulz
 rei a reaz eunn ali dezhi
 evit gallout he frealzi :
 mont epad teir nozvez, 'mezha,
 mont war he bez da loja,
 Ne vankaz ket ar genta nosvez
 ez eaz ar plac'h-mañ war he bez.
 Ar c'henta tavancher a gasas
 war bez he mamm her lekeaz.
 pa velaz allumi ar goulou
 e lezaz ann tavancher eno
 hag ez eaz neuze da guzet
 er govesion leac'h m'oa kelennet.
 da boent ma teu ann anaoun
 da ober ° he procession. °a-us : en dro
 Divizet int e teir banden :
 re zu ha re vriz ha re wenn.
 touez ar re zu edo he mamm.
 na p'he gwelaz pebez estlamm !
 hag hi o krigi enn tavancher
 hag e regi /e c'houeac'h karter/^o °a-us: dre an hanter
 ne vankaz ket ann eil nosvez
 maz eaz ar plac'h-man war he bez.
 an eil tavancher a gasas
 war bez he mamm her lekeaz.
 pa velaz allumi ar goulou
 e lezaz ann tavancher
 hag ez eaz neuze da guzet
 er govesion leac'h moa kelennet.
 da boent ma teu: ann anaoun
 da ober enn dro he prosession
 /divizet/ int e teir banden^o: °a-us: rannet...etre...
 re zu ha re vriz ha re wen. lodenn
 e-touez ar re vriz edo he mamm.

- 68 -

na p'he gwelaz pebez estlamm !
 eur c'hoar he doa ar plac'h-se
 a wilioudaz en nosvez-ze.
 dre ma zeo bet pell e poan
 genel a reaz eur verc'h vihan.
 ac'hano ez eaz da Landreger
 evit lakaat he henvel.
 Ar belek out-hi a c'houlennaz
 hag enn hano he mamm he lekeaz,
 enn hano he mamm e lekeaz
 hag ann noz-ze 'r plac'hik a varvaz.
 'n tro noz he c'hovessour en deuz laret
 eur pec'hed braz hoc'h euz-hu gret
 p'hoc'h euz ann noz-man market.
 Brema p'hoc'h eus her kommanset
 e ranko beza finisset.
 Ne vankaz ket an trede nosvez
 ez eaz adarre war he bez.
 ann trede tavancher a gasaz
 war bez he mamm he lekeaz.
 Pa velaz allumi ar goulou
 e lez ann tavancher eno
 hag ez eaz neuze da guzet
 er govesion leac'h m'oa kelennet.
 Da boent ma teu ann anaoun
 da ober en dro he frocession,
 divizet int e teir banden :
 re zu ha re vriz ha re wenn.
 e-touez ar re-man edo he mamm.
 na p'he gwelaz pebez estlamm
 hag hi kregi enn tavancher
 heb e regi dre an hanter
 da gas dezhi er govesion.
 - Gant Doue te a zo bet miret
 pa n'oud ket ganen dispennet,
 evel maz eo da davancherou,
 rak kreski a reant va foaniou.
 Ar plac'hik bihan a c'heuz hanvet
 em hano ec'h euz hi lekeat
 hounnez e deuz a boan tennet
 breman me ia d'ann eurused
 ha te zo great ivez da blas
 Rak se ta bez e stad a c'hras.

vvvvvvv